

DANVEZ PROGRAMM LENNEGEZH A-VREMAÑ

Er rummad kentelioù-mañ e vo taolet ur sell a-dost war al lennegezh vrezhonek en XXvet kantved. Diwar lenn ha dielfennañ arroudennoù gant ar skrivagnerien o-unan, klasket e vo termeniñ splann emdroadur al lennegezh hervez red an amzer.

- UI lodenn a denno kentoc'h da brantad an "Emzao" kentañ, etre krouidigezh an URB e 1898 ha spered -barded- 'zo er mare-hont (F. Jaffrenou, Erwan ar Moal).
- Un eil lodenn a bledo gant pouez ar c'helaouennoù e-pad ar prantad-amzer etre an daou vrezel-bed, da skouer gant lusk Feiz ha Breiz (Jean Louis Prigent, Fransez Kervella) pe c'hoazh gant Dihunamb (Charles Cotonnec, Joseph Seveno, Iwan an Diberder).
- Un trede lodenn diwar-benn ar gelaouenn Gwalarn a zielfenno un nebeud skridoù gant skriderien ar gelaouenn (Frañch Elies Abeozen, Yann Sohier, Guilherm Berthou-Kerverzhioù).
- Da glozañ an heuliad kentelioù e vo kinniget ganeomp pleustriñ war un dibab a bennadoù eus kelaouenn Al Liamm (Yann Kerlann, Per Denez hag, anat deoc'h, Ronan Huon).
- Hervez an ezhommoù, ar goulennoù ha red an amzer hon devo ar blijadur da vevañ a-gevret e c'hellfe ivez bezañ kendalc'het pellikoc'h en amzer gant ur prantad post-68s hag an darempredoù etre ar c'hoariva brezhonek hag ar stourmoù sokial (Goulc'han Kervella, Rémi Derrien, Guilhoù Kergourlez ha re all).

EVEZHIADENN : Pleustret e vo war an danvez-se bemdez eus 9 eur betek kreisteiz hag eus 2 eur betek 5 eur goude kreisteiz, a-hed ar sizhun.

Ar stajidi o devo dibabet mont gant ur rummad diouzh temoù ne c'hellint ket kemer perzh er c'hentelioù brezhonek kinniget diouzh live an dud.